

258

An fol° 54 recto, titre (écrit au crayon): Traonvilin 15

Traonvilin

(f° 54 verso)

An Traonvilin a Plougasnou
 Bravan den iaouank zo er bro
 Bejan eo fleur ar beleien
 A tud chentil a bourc'hisien.

Me a zo ur Kloarek iaouank
 A zo ma ti kichen ar stank.
 Biskoas ne moa laket faltazi
 Da glask merc'het d'ha plijout din.

Anaveout e ris ur plac'h trivoc'h bloa
 Nemert pe gwelan ne moa joa
 Bejan e mo anei dre grass Doue
 Nemer ma tad, ma mam, en arze.

Pa voan en oad da dimisi
 E voan kasset da paris d'ar studi
 Evit ma fellaat diout-in
 ho sonj ne voa ket ma hini.

Pe woan bed eur pennet er studi
 Ma dous a digassas lijer din
 Da zonnret prompt deus ac'hane
 Mar moa c'hoant dhe gwelet en bue.

Pa entreiz ebars en ti
 e voa ar belek ous he noui
 O rei dezi er gras diverzan
 Kent evit monet deus ar bed man.

Pa voa ed an dud emez an ti
 A me komans da deplori
 A ma mestress d'am c'honsoli
 Gant ur voez dous e laras din:

(f° 55 verso)

tevet Kloarek na velet ket
 Pedit evit hon me o ped
 Gwelet abalamour da Doue
 Behini e offensomp bemde.

Tostet d'am gwele aman,
 Ar menat digannac'h e c'houlennan
 Chetu c'houi ur savant Kloarek
 Sentit ouz o tud, nem rentet belet.

Kloarek Traonviliñ a lare
 Er ger d'he mam pa n'arrue :
 — Tollet - hui ma oll leviou en tan
 Pe roet - he d'am breur bihan.

Me moa d'am mestres promettet
 Birtiken ne vijen belet
 Nemert ma tud ma c'hontraigne
 A mar rejint me kuitaje.

Evelt ~~sur~~ Santez e ze maro
 Me ia d'ar c'houent da bell bro.
 Kenavo ma mam a c'houi ma tad
 Dam c'hoarezet avantur mad.

(f° 56 verso)

Deus ma breudeur na kimmiaday ket
 Dont e raint d'ar c'houent d'am gwelet
 Da velet ho breur a vo kapussin
 Na zeus mui da traonviliñ.

Ne neus plac'h iaouank ar ⁽¹⁾ c'hanton
 Na savo ar glas en ho c'halon
 Pa klevint ar Kleier o sonnet
 Da traonviliñ zo maro d'ar bed.

Ur bloa goude Mari Javre
 Gant he fried da Naonet a hie
 Hon toul dor ar gouent pa n'arrue
 E map Kloarek a c'houlenne.

(1). - Peut-être faut-il lire : er ?

Nemedi kin ho map kloarek
 An tad Fidel Kapucinet
 Gwirisket gantan ur sae gris
 Ag ous he errey ur c'houris.

Ed eo ar procession en dro
 Pa distrois c'hui en gwelo.
 Peo bed a[r] c'hentan offis
 Eo bed arvu, gwirisket en gris.

Debonjour ma tad deud oc'h d'an gwélet
 Ma mam ag hi zo en iec'het ?
 — Iec'het arvalc'h hor meufmij digant Doue
 Deud eo dan Naonet Ker Koubz a me.

Karantez ar mam neuz bugale
 A zo deud ker pell evit en me.
 Eo deud d'an Naonet d'an gwélet
 Kouskoude ney miritan ket.

(f° 57 verso)

Mar c'harjac'h ma map bean chomet
 Tostik dimp da vout belek
 Joussted gannach e moamp bed
 Da monet bep sul d'an offerm bred.

Bezan bellek ma mam a zo kargus
 Gwell eo bezan relijius,
 Ouspen, nim-hu chang deus ho ine
 Ineu ar re all e maint ive.

Evit en rented joa en douar
 Un eternite deus a Kloar
 an promet Doue d'an ine
 En servijo er vad er bed me.

En menez labvar zo ur groas
 Ar Kaero a zo bed biskoas
 Dimp oll da sikour de dougen
 Evelt a neus graet ar Madalen.

Mar digoue gam-in eritaj

Roet d'ar peorien ma partaj
Er c'houant e chommo ho map Fidel
Da tremen he vue ac'han mervel.

(Le père Fidèle est mort à Plourin.)

7

M^{ade} de S^t Prisp.